

PEDEN DA ZANT JOZEF

War dôn : *Mamm zantel da Zoue !*

Tad mager da Jezus, pried ma Mamm garet,
Ma zad karantezus, sant Jozef binniget,
Eus ho tron en Envou, roet d'in ho pennoz,
Ma kerzin er furnez, war eün d'ar Baradoz.

Doue ho kavas mat en ho pue kuzet,
Da viret a bep droug, Mari hag he gwerc'hdet ;
Den just ez oc'h hanvet en levr an Aviel ;
Eunoc'h e oa fiziet Mab an Tad Eternel.

Gant ar vrasan fianz me ro d'ac'h karg ive :
En em ine dinerz kresket ar garante ;
Evel Salver ar bed me ho kalvo mo zad ;
'Ret ket skouarn vouzar pe e vin emzivad.

Ma zad, p'hoc'h eus miret Jezuz ouz ar maro,
Rôk kounnar Herodez p'hen kasec'h da bell vro,
Pa welet an Drouk-El o klask koll ma ine,
D'am zikour, Tad Zantel, o ! diredet neuze !...

An ifern fuloret muioc'h evit biskoaz,
A glask en hon c'halon mouga ar fe, siouaz !
Mez a-enep Satan, enep e vevelien,
A-zindan ho skoazel kuzet ar Gristenien.

Ma Jezuz war ho prec'h 'lies 'n eus diskwizet,
Ha war boull ho kalon e benn an eus chouchet,
Ma ine paour brevet 'n em deul tre ho tiouvrec'h ;
Ar bugel gant e dad a ve bepred dinec'h !

Ho pue oa mesket a joa hag a c'hlac'har,
Renket hoc'h eus 'veldomp poanial war an douar ;
Bras oa ho santelez, lezet ho poa Doue
Da gas pep tra da benn herve e volante.

O tad ar zantelan ! d'imp eta goulennet,
Gant eur galon izel, ar vertuioù kuzet ;
Gret ma klaskimp 'veldoc'h rentan gloar da Zoue !
Ha bevan 'n e zoujans hag en e garante !

Sikouret ac'hanomp da ren eur vue vat,
Ha, pa vo red kwitât ar bed-man evit mad,
Gret ma vezimp santel betek 'n hon agoni,
Ha ma varvimp 'veldoc'h 'tre Jezuz ha Mari !

PEN-BRETON.

IMPRIMATUR

Brioci, die 6^a Aprilis 1909

Y.-M. LE PENNEC,
Vicaire général